



TRUEZ, GWERC'HEZ VARI !


KANTIK AR VREZEL



Gwer-c'hez Va - ri, daou - li - net holl di - rag ho skeu - den,



Ni ho ped da rei skoa - zel d'hor bro ger en an - ken :



Vik - tor ha peoc'h gou - len - nit di - gant Dou - è dez - hi...



He stad a zo gwall boa - nius : tru - èz, Gwer - c'hez Va - ri !

Gwerc'hez zantel, Rouanez an Nenv hag an douar,
 Gwelit : hor Breiz 'zo beuzet e'r c'haon hag e'r c'hlaç'bar, —
 Bro Frans, Merc'h hen' an Iliz, a zo braz he enkrez...
 Piou' zeui'ta d'ho frealzi nemed-hoc'h c'hwï, Gwerc'hez ?

Ia, Mam, gant tud digalon hor bro gaer 'zo breset, —
 O d'euz, 'n eur zond d'he gwaska, grêt kant ha mil torfed...
 Pegoulz 'ta, Mam a druëz, e reot d'an dud fall-ze
 Dizrei d'ho bro ho-hunan, trec'het gant hor c'hleze ?

O Mam, evit hon difen a-eneb al laeron,
 Holl hor breudeur 'd'euz redet, gras Douë 'n ho c'halon,
 Evit ar Frans, ho mam-vro, prest da rei ho buhez...
 O Mam, klevit hor peden : varn-ho beillit bemdez !

Siouaz, e-kreiz ar stourmad, kalz dija 'zo maro :
 Ma 'z aint buhan d'an Nenvou, Mam, petit evit-ho !
 Petit c'hoaz 'vit ar gragez, mammou ha minored
 O d'euz kollet e 'r vrezel ho zad, mab pe brêd !

Oh ! gloar d'an Drinded Zantel, tri Ferson e Douë,
 Ha gloar d'ar Werc'hez Vari, Mam Jesus hor Rouë !
 Ra zeui' an holl d'Ho c'hared, ha dre-holl ha bemde,
 Ma 'z aimp 'kevred d'Ho meuli d'ar Baradoz goude !

AMEN.

IMPRIMATUR :

Cortsopiti, die 1a Novembris 1916.

A. GADON, v. g.

Ce petit cantique, composé sur un vieil air breton par le R. P. TRÉBAOL, O. M. I., est en vente aux bureaux du *Courrier*, rue du Château, à Brest, aux prix suivants :

1 ex., 0 fr. 05 ; — 12 ex., 0 fr. 50 ; — 25 ex., 1 fr.